

KLAS a 4vet - 4 a viz C’hwevrer 2002

DEVER ISTOER

Teul 1



A FAUT ESPERER Q'YU SE JEUE LA FINIRA BUN'FOT



«S'VITEZ BEN QU'Z'AUHONS NOT' JOUR...»

Skeudenn A

ESPER AM EUS E VO FIN D'AN C'HOARI-MAÑ
KENT MA VO PELL

Skeudenn B

ME 'OUIE 'WALC'H EM BEHE BET MA ZRO
UR WEZH BENNAK !


“Bevet ar Roue, Bevet ar Vroad” a lâr an den er
skeudenn B

Teul 2

- Ne vo ket savet taos erbet hep konsantamant ar Stadoù-Meur. (A)
- Tolpet e vo ar Stadoù-Meur bep pemp blez. (B)
- Torret e vo rac'h an dreistwirioù, re an duchentiled ha re ar gloer. (C)
- Torret e vo ar salorjerezh¹, an tailhoù², an trujoù², an ugentvedoù², ar sikourioù² hag ar gwirioù arall². (D)
- E-lec'h an taosoù-mañ e vo savet taosoù nevez ; sitoaiened an tri urzh, hep diforc'h, a vo ret dezhe paeñ an taosoù nevez-mañ. (E)
- Aboliset-groñs e vo an aner³. (F)
- Torret e vo justis ha polis an aotrou, ar gwirioù àr ar jiboesaerezh hag àr ar beskerezh, ar boutinelezhioù⁴, ar sens² ; pep unan en do droed da lazhiñ, en e barkoùier, ar c'honifled hag ar loened arall a ra dismantr a-barzh. (G)
- Roet e vo ar c'hargoù⁵ hag an ofisoù⁵ d'ar re o do-int meritet. (H)
- An implijoù⁵ sivil ha militaer, an implijoù-Iliz ne vint ket mui roet d'an dud a noblañs e-raok tout ar re 'rall. (I)

Kaier klemmoù an Trede-Stad, La Chapelle-Craonnaise,
jeneraldeg⁶ Tours, nevez-hañv 1789

1. Salorjerezh : taos diàr an halen.
2. Taosoù dalc'hel (feodel) arall.
3. Aner : labour palfors evit an aotrou.
4. Boutinelezhioù : oblij da implij forn an aotrou, melin an aotrou... evit argant.
5. Postoù-labour (interessant evit ar re o doa-int).
6. Jeneraldeg : ≈ kornad-bro.



Teul 4

Tud parrez Houdon, e distrikt Ancenis (Bro-Naoned) o deus lakaet ar gronn àr gêr Ancenis. Skriv a raont da gêriz, evit displeg dezhe perak emaint fallgontant.

[...] Ne faot ket deomp bout palforsed da guitaat an douaroù a labouromp, na dre ar choaz¹ na dre an tennaj¹. Penaos e c’heller komz a frankiz, a pa vez skrapet an dud palfors a-vesk ar re a garont, evit o c’has enep d’o santimant da vroioù estrañ-jour ?

N’hor laosker ket da heuli hor relijion d’hor soñj. [...] Faot a ra deomp bout libr da gavout e-taldomp beleion a c’hellomp kaout fiziañs enne. Ne c’houlenomp ket distro gwirioù an duchentiled, n’omp ket-ni amiet d’an diranted ; kontant-bras omp bout tennet, ni hag hon douaroù, a-zan yev ar sklavaj.

Meurzh 1793

1. Ar choaz : e pep parrez e c’helle bout choazet tud, get pennoù bras ar barrez, evit monet d’an arme
2. Tennaj : *tirage au sort*

Ur sujed da choaz e-mesk an daou a zo kenniget amañ edan. C’hwil a responto get frazennoù klok. 2 boent a vo evit ar feson ma vo prezantet ho tever deoc’h.

1/ GOULENNOÙ (18 poent)

Teul 1.

1. Piv eo an tri den a weler àr an div skeudenn ha pezh sort tud (pezh rummadoù tud) a zo reprezantet gete ? (1 pt)
2. Perak e weler daou anezhe àr gein an arall, er skeudenn A ? (1 pt)
3. Petra en deus chañjet er skeudenn B ? (1 pt)
4. Pezh deiz ema arru ar chañjamant-se ? (1 pt)
5. E-raok pe goude Genver 1793 ema bet treset ar bentadenn-mañ ? Justifiit hoc’h respont. (1 pt)

Teul 2.

6. Petra eo ar “c’haieroù klemmoù” ? (1 pt)
7. Kaier klemmoù an Trede-Stad a La Chapelle-Craonnaise eo hennañ. Get pezh sort tud, pezh rummad tud ag an Trede-Stad eh oa bet skrivet ? Justifiit hoc’h respont. (1 pt)
8. Un droed resis-mat goulennet get tud La Chapelle-Craonnaise a zo pennkomz anezhoñ ivez en teul 1. Pezh hani ? (1 pt)
9. Menegit un nebeud klemmoù a denn d’ar politikerezh, d’an taosoù (e argant pe e devezhioù labour), d’an ingalded etre an dud. (2 bt)

Teul 3.

10. Displegit petra eo ur beleg didoui ? (2 bt)
11. Beleion touiour pe beleion didoui a zo ar muiañ e Breizh ? (1 pt)

Teul 4.

12. Pezh sort tud a gomz amañ, d’ho soñj (tud a gêr, tuchentiled, tud a-ziàr ar maezoù, beleion...). Justifiit hoc’h respont. (1 pt)
13. Menegit div gaoz dezhe da vout fallgontant. (1 pt)
14. Menegit, get sikour an daolenn, daou vuzul kemeret get ar pennadurezhioù (*autorités*) dispac’hel hag a zo abeg (= kaoz) dezhe bout fallgontant. (1 pt)
15. Enep-groñs d’an Dispac’h ema an dud-se ? Justifiit ha displegit hoc’h respont (2 bt)

Nevez-hañv 1789	Skrivet eo ar c’haieroù klemmoù get tud an tri urzh, e pep lec’h e Frañs
Goureneñv 1789	“Aon Bras” àr ar maezoù un tammig e pep lec’h e Frañs
4 a Eost 1789	Torret eo dreistwirioù an noblañs hag ar gloer. Posupl e vo preniñ gwirioù dalc’hel (feodel) an noblañs
28 a Eost 1789	Diskleriadur Gwirioù an den hag ar c’heodedour
2 a Galan-Gouiañv 1789	Broadelet eo madoù an Iliz ; gwerzhet e vint d’ar santaol (<i>enchères</i>) adal 1791
22 ag an Azvent 1789	Bouezhiñ-sens : ne c’hell ket bouezhiñ ‘met ar wazed a bae un taos (gwerzh tri devezh labour)
27 a Galan-Gouiañv 1790	Ret eo d’ar gloer touiñ bout felan (fidel) d’ar Bonreizh
29 a Galan-Gouiañv 1791	Dekred enep d’ar veleion didoui
Mae 1792	Prizoniet eo ar veleion didoui
21/01/1793	Dibennet eo ar roue
24/02/1793	Sav an 300 000 den, evit monet da zifenn ar vro. E pep distrikt (= tolpad kantonioù) e vo “choazet” pe tennet d’ar sord ar re a yaj d’an arme.
2 a Veurzh 1793	En em sevel a ra an dud a-ziàr ar maezoù er Vañde, hag ivez er Liger-Izelañ (Bro-Naoned), en ur lodenn vat ag ar Mor-Bihan hag a an Il-ha-Gwilun, a-dachadoù e Aodoù-ar-C’hreiz hag e Penn-ar-Bed

2/ PENNAD ARGUZENNAOUET (18 poent)

Savit ur pennad 20 linennad bennak ma lâroc’h :
 - da gentañ penn petra a soñje ar beizanted dre vras, e Frañs, doc’h deroù an Dispac’h,
 - ha goude petra en deus lakaet lod anezhe, e Gwalern Frañs dreist-oll, da chañj soñj daou pe dri blez àr-lerc’h.

C’hwil en em harpo àr an teulioù, àr an daolenn, hag àr ar pezh a ouit, ha c’hwil a skeudennaouay ho pennad get skwerioù tennet ag an teulioù.